



CHANSON

*Var sujet ur Zoudard yaouanq hac e Vestres,
dispartiet er bloa 1832.*

Var un ton nevez.

TOSTAIT, asistantet, hac e clêfot cana
Ur chanson zo composet a nevez er bloa-mâ,
D'eur Zoudard ha d'e Vestrez, en em dispartiet,
Er bloavez daou ha trêgont gant an tenn ar billet.

Dont a ran da explica preposiou excellant,
Pere a zo contradet entre daou zen yaouanq,
O tonet da hroneti un tamic re abret,
En fot beza gortozet qen en dije tennet.

Trivac'h mis trizec devez int bet en em hentet,
Hervez an disclaration pehini o deus grêt
Hac en geit-se a anzer e c'hreyout ur chaden,
Ha lacat en o speret na dorzo birvigen.

Goude greya ur chaden, e reont vantezon
Na vije laqet biqen ar separation,
E voant choaset gant Doue da veza priejou,
Hac e vijent unisset bete fin o deizioù

Cetu int gant plijador o rën o yaouanqis
 Dre an oll assembleou epad un trivac'h mis,
 Qen a recevont avis digant un den savant:
 Enues a laca genet un tam o zantimant.

O clêvet ar preposiou o deveus prononcet,
 O lavarët hirvigen na vijent separet:
 Ar maro hac ar billet a ell o separti,
 Hac e creis o flijadur o lacat en anui.

Diou deiz arauc ar termen p'ini o deus fixet
 Evit lacat o hano da veza embannet,
 Ec'h êru urz da denna partout er paretiou;
 Cetu fin d'o flijadur ha d'o fromessaou.

Dout a r'ar zoudard yaouanq da d'enna d'ar billet;
 Diguezet eo bet gantàn un numero seitec:
 Cetu ma partia ha quittât e vestres,
 Ha terri ar promesse o deus grêt assambles.

Un deiz aranc ma parti, e ya d'e zaludi,
 Evit conta e rêson ha clêvet e lini,
 Da c'houlen outi ar merq demeus o amitie,
 M'en dije sonc anezi bete fin o vûe.

Salud, va muia caret; deut oun en ho pete,
 Da c'houlen ouzoc'h ur merq demeus hon amitie,
 Qen dister ha ma qerôt, vit me sônjin bepret,
 O tont da sellet ountàn, en amzer dremenet.

Qemer a rá he alc'houez ha mont d'e c'hontouer,
 Ha laqat en e c'hodel ar c'haera mouchouer,
 Ur rochet frisetenet demeus ar penn qentàn,
 E devoa grêt evitàn pa cureuche dezàn.

Ar Plac'h oc'h instrui he c'hompagnon.

Eyel pa vec'h o clêvet un docteur o sermon,
 Laqit ar pez a larit en hoc'h ompinion;

Na deuit qet da disalti drauc fin ho conje;
Pe e vezot punisset, hep egard na true.

Bezit ur zoudard vaillant en hoc'h exerciçou,
Ha rentit soumission d'ar re ho comando.
Mar deu dec'h beza blesset e servich ar Roue,
Oc'h sur eus ur bansion bete fin ho pue.

Ha me ar viserables a renco chom amañ,
Da c'hounit va zam bara tol di'ol er vro-mañ;
Ha pa gafen ur fortun a zaou c'hant scoët leve,
Birvigen na eureujan qen vo fin d'ho conje.

Ar Goas.

Doue d'ho cuntunuo er memes santimant,
Ho clac'har ha va hini a zo pareillamant.
Mar be bolonte Doue, goude fin va c'honje;
E vezimp c'hoas unisset ar rest eus hor bue.

Ar Plac'h.

Selaouit, va servicher, qent eguet partian:
Pa scifot ho lizerou da zigas d'ar vro-mañ,
Laqit din gourc'hemenou, ma clévin ho qelou,
Ha mar bez din an adress, e vo me o lenno.

Pressi a ra an amzer d'en em dispartia:
Laqit ho torn em hini: qen ar guelet qenta,
Graç deomp, mar bemp separet er bed-mâ gant Doue,
D'en em velet assambles en joaütet an êc.

An hini'n deus composet ar chanson nevez-mâ,
A zo suppliet gante da zont d'e explica
Dirac an asistantet, ha qement be selaou
Hac he lenno var baper: *Yan ar Guen e hano.*



GUERZ

COMPOSET A NEVEZ

VAR SUJET AR C'HLÉNVET BRAS.

Var un ton nevez.

TRE Ferson demeus an Drinded,
 A greis va c'halon me ho ped,
 (Me ho ped da rei speret ha lumier
)Da explica en bêr amzer.

Ar voerez nevez zo composet
 Var ar sujet deus ar c'hlévet
 A zo o rên en hon meseo ;
 Goullomp ar c'hraç ma finisso.

Gant Doue e zeo digasset,
 Ha pa scuiso ous e velet
 Ha rai fin d'ar bunission,
 Er c'hœariou ar bobl ar c'hanton.

Va mignon, fidel d'hon dever
 Evel, siouas, na neus nemeur,
 E vije divarnomp troet
 Ar planeden hir ha calet.

Mar domp punisset gant Doue,
 Eo ni zo caus da guementse,
 Dre an injur hac an offanç
 A gometomp en e bresanç.

Arauc ma zeo deut ar c'hlévet,
 N'hor boa carantez na respet,
 Mé a gred qen ma finisso,
 En n'em garo nep a chomo.

Pa velàn ar bunission
 Qen rigourus ha qen guirion,
 A dle donet d'en offanci,
 A chom ane n'em brepari.

P'en deus scuillet ô va Jesus!
 E rei evit domp e voad precius,
 E tleomp rêi ar plaç qentàn
 Demeus hor c'halonou dezàn.

Hac o rancontri a reomp,
 An drouc-speret a breferomp,
 Ar blijadur hac ar viçou,
 A enep d'e c'hourc'hemennou.

Ar re o deus calz a voyen

A sonch dezo en bêr dermen
 Gant ul loden deus o madou,
 Beza exant deus ar maro.

Mes en em drompla a reont,
 En o esperanç pa vevont;
 Pa vezint galvet gant Doue,
 E ranqfont renonç d'o danve.

Petra neuze a dalvezo
 Dê beza dispignet o mado?
 Eur veach êt divar ar bed,
 Na devint biqen d'o guelet.

Greomp etre m'o deus amzer,
 Œuvrou mad, pa ellomp ober,
 Rac hirio omp yac'h da greis-de
 Ha decedét un heur goude.

En em strincomp oll d'an daoulin,
 E qichen treid hon Mestr divin,
 Evel ma rê ar Vadalen,
 Gant qeuz d'e buez disordren.

Ni neüs cunduet er bed-màn
 Ur vuez voas eguet houmàn,
 Pa glêvas Jesus o prezec,
 E voe ractal convertisset.

Ni a glêo bemdez e gomzou,
 Hac e oll avertissamançou,
 Da laret deomp chench a vue,

Ma sonjal en eternite.

Demeus ar maro e zomp sur,
 Hervez ma lenner er Scritur; Hervez
 Ne domp nemet passagerien, Ne
 Er bed, ur pennad o tremen. Er

Ar sonch eus an eternite
 dle lacat trist hon enē, A dle
 hon oblich da c'houlen pardon Hon
 Dous Doue gant contrition. Dous

Pardon eta, ô va Jesus!
 a zoc'h misericordius, Pa
 rit ma vezimp heritourien grit
 a joayou an en da vigen. En

Ebars er bloa daou ha tregont
 mâ ar glac'har hac ar spont E mâ
 ant an dud dre oll o vervel, Gant
 vont d'ar vuez eternal. O vont

Dre ar c'hlenved'gen maleurus,
 anvet ar C'holera-Morbus; Hanvet
 ra un nombr bras minorou, A ra
 c'hæriou hac er baressiou. Er

En te-all da guær Landreguer,
 euil e hano var baper, Eleuil
 daou vis-anter zo maro En
 houec'h-uguent den pe dost vardio, C'houec'h

An hini en deus composet
Ar Voerz var, sujet ar c'hénavet,
A zo *Yan ar Guen* e hano,
Douguet var an neventizo.

FIN.



E Montroulez; eus a Imprimeri LÉDAN.